

Couplet 1

Me 'zo ganet e-kreiz ar mor,
Teir leo er-maez
Un tiig gwenn duhont am-eus,
Ar balan 'gresh e-tal an nor,
Hag al lann 'holo an anvez.
Me 'zo ganet e-kreiz ar mor,
E Bro Arvor!

Couplet 2

Va zad a oa 'vel e dadou,
Ur martolod!
Bevet e-neus kuzh ha diglod
Ar paour, ne gan den e globou!
Bemdez, bebnoz, war ar mor blod
Va zad a oa 'vel e dadou
Ur martolod!

Couplet 3

Va mamm ive(z) a labouras,
Ha gwenn he bleo,
Ganti ar c'hwez war hon talou,
Desket am-eus bihanig-tra:
Medi ha tenna avalou;
Va mamm, ive(z) a labouras!
D'hounit bara!